


PRIX : 25 FRANCS



N^{os} 3 et 4

Kan-Bale ar Falc'herien

Un dispud' tre Yann ha Janed


SUPPLÉMENT A « AR SONER »

Kan-Bale ar Falc'herien


*Kan-bale savet e Lennon war-dro 1880 ha kanet
gant an Itron Toullec, eus Keraez.*

Komzou dastumet gant
Albert TREVIDIC


Ton dastumet gant
Polig MONJARRET



Se - la-ouet holl ha Selaouet, Eur bal nevez a zo savet ,



Tamm turllet-te bar-bi-net-te , jub-li-bit-te landur-le-no



Tamm-turiet-te barbi-don - jub-li-bit-te lan-dur-lon.

DISKAN

*Tamm turllette barbinette,
Jub Libitte lann durleno,
Tamm turllette bar bidon,
Jub Libitte lann durlon.*

I

*Selaouet (1) holl ha selaouet,
Eur bal nevez a zo savet. } 2 wech*

II

*'Zo graet d'eun nebeut falc'herien }
Pere n'ouzont ket troc'ha foenn. } 2 wech*

III

*Lod a droc'h hir, lod a droc'h berr, }
Ha lod all 'droc'h dre an hanter. } 2 wech*

(1) Selaouit.

Un dispud 'tre Yann ha Janed

Ton savet e Lennon, war-dro 1880, ha kanet
gant an Itron Toullec, eus Keraez.

Komzou dastumet gant
Albert TREVIDIC

Ton dastumet gant
Polig MONJARRET



Di - dos-tit Koz ha ya-ouank Da selaou an dis-pud ,



la-Kaat ra-femp da c'hoarzin eun darn vras eus an duð .

I

Didostit (1) koz ha yaouank da selaou an *dispud* (2), (2 w.)
Lakaat 'rafemp da c'hoarzin eun darn vras eus an dud. (2 w.)

II

Savet eo 'tre Yann ha Janed, war-benn ar *briadelez* (3),
Hag o daou int *kountant* (4) bras da vont en o ziez.

III

« O ya te, va Yannig paour, gant *joa* (5) vras va c'halon,
Pa gari yafemp hon daou betek ti ar person.

IV

Met 'raok da zimezi, ret e vo deomp *gwelet* (6),
Penaos e kerzo an traou goude 'vimp eureujet.

V

C'houi 'yelo da zevezour 'po dek gwenneg bemdez,
Ha me am bo seiz pe eiz ivez ouz va *c'hostez* (7)

VI

Met neuze te, Yannig paour, ret e vo deomp *gwelet*,
Pelec'h 'kavfemp gwalennou 'benn devez an eured.

VII

Gant an dra-se te, Janed, n'ez ket d'en em jala,
Me ' glasko dit eur walenn unan eus ar c'haera.

VIII

Ne vo ket e diamant, en arc'hant, nag en aour,
Gwalennou eus ar seurt-se, n'int ket evit ar paour.

IX

Me a yelo ganez-te, da di ar panerer
Hag eno vezo Janed danvez kalz gwalinier. »

(1) Didostait. — (2) Burutelladen. — (3) Daou droad stagadennet. — (4) Laouen.
— (5) Levenez. — (6) Gwelout. — (7) Tu.